

Oan Doue :

Oan Doue a lam pec'hedoù ar bed : ho pet truez doc'homp ! (bis)
Roit deomp ar peoc'h !

Kent ar gomunion :

*Ar beleg : Setu Oan Doue, setu an Hini a lam pec'hed ar bed :
Eürus ar re a zo galvet da bred santel an Oan.*

**R/ : Man Doue, ned on ket dign ma tait davedon,
met lârit ur ger hepken hag e vo aesaet din.**

Komunion : Karit ho preuder, hag e vin geneoc'h.

- 1 Me eo ar bara daet ag an neñv. (2w) 4 Ma chom ma c'homzoù bev ennoc'h. (2w)
Neb a gred ennon 'deus ar vuhez. Goulennit get feiz, roet e vo deoc'h.
- 2 C'hwi holl a zo skuizh ha sammet. (2w) 5 'Vel m'en deus an Tad Ma c'haret, (2w)
Dait ha Me 'roay deoc'h nerzh ha kalon. 'Vel-se ivez am eus ho karet.
- 3 Dait, c'hwi a glask ar wirionez, (2w) 6 Me eo ar vuhez, ar wirionez, (2w)
Ma c'homzoù zo spered ha buhez. An Hent ho kaso betek an Tad. !

'Cit kloziñ an oberenn :

Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h : **R/ : Ha get ho spered !**
Ar beleg : Doue hollgelloudek d'ho pennigiñ :
An Tad, ar Mab hag ar Spered Santel. **R/ : Amen !**
Ar beleg : Kerzhit e peoc'h hor Salver : **R/ : Bennozh da Zoue !**

Kan-dibenn : Ô Rouanez karet an Arvor, Ô Mamm lan a drue(z)

Àr an douar, àr ar mor, Gouarnit ho pugale.

- | | |
|---|--|
| 1 Intron santez Anna,
Ni ho ped a galon :
Get joa ni em laka
Edan ho kouarnasion. | 3 Patronez Breizh-izel,
Doc'hoc'h en deus rekour
Hos Arvoriz fidel,
Reit dezhe ho sekour. |
| 2 Ho kalon 'zo digor
'Veit holl ar Vretoned ;
An dud ag an Arvor
Ho kar ivez bepred. | 4 Intron lan a zouster,
E holl hon doberioù
Diskoeit en hor c'heñver
Gelloud ho pedennoù. |



Bep sul ketañ ar miz : overenn da 10e30 e chapel ar Werc'hez.

Pardon santez Anna :

**overenn da 9e er Penniliz,
d'ar 26 a viz gourhelen.**

Parrez Ker Anna

14^e Sul ordinal blead B

7 a viz Gourhelen 2024

Iⁿ lenn. : Ez 2,2-5 2^l lenn. : Ko 12,7-10 Aviel : Mk 6,1-6

Kan digor : Allelouia, Allelouia, Allelouia (div wezh)

Holl embannit eo mat an Aotrou, peurbad eo e garantez,
ra lâro tiegezh Israel, peurbad eo e garantez.

En anken 'm eus youc'het davetañ ha respontet en deus din,
An Aotrou a zo doc'h ma difenn, ma enebour 'm eus trec'het.

Ma nerzh ha ma c'han eo an Aotrou, sklêrijenn eo an Aotrou,
ne varvin ket, nann, beviñ a rin, E oberoù a ganin.

Salud d'ar bobl :

*Ar beleg : Gras hor Salver Jezuz-Krist, karantez Doue an Tad
hag unaniezh ar Spered Santel, ra vint geneoc'h-holl :*

Respont : Ha get ho spered !

Kyrie (Ordinal hervez ton gwerz Pontkalleg)

Glória : (Guilloù) Gloria ! Gloria ! In excelsis Deo ! (2 wezh)

Peoc'h àr an douar d'an dud karet getañ ; Ho meuliñ a reomp. Ho trugarekaat a reomp. Hoc'h adoriñ a reomp. Enor deoc'h a ganomp ha mil bennozh aveit ho kloar hep par. Aotrou Doue, Roue an neañv, Doue an Tad hollgellougek. *Aotrou, Mab unganet, Salver Jezuz. Aotrou ha Doue, Mab an Tad. C'hwi hag a lam pec'hed ar bed, ho pet truez doc'homp. C'hwi hag a lam pec'hed ar bed, degemerit hor pedenn. C'hwi hag a zo azezet en tu dehoù d'an Tad, ho pet truez doc'homp.*

Rak C'hwi hepken a zo santel. C'hwi hepken a zo Mestr. C'hwi hepken a zo uhelmeurbet, Salver Jezuz, Get ar Spered Santel, e gloar Doue an Tad. Amen !

Lennadenn gentañ : Lennadenn tennet a ziougan Ezekiel

*En deizioù-se, ur spered a yeas ennon hervez ar pezh en devoa lâret din, hag am lakaas àr sav àr ma zreid, hag e klevis an hini a gomze doc'hon. Lâret a reas din : «Mab-den, ho kas a ran davet maboù Izrael, davet ur boblad tud emsavet, ur boblad hag a zo en em savet a-enep din. Int-i hag o zadoù a zo bet treitour em c'heñver betek an deiz-mañ. Davet ar maboù-se kalet a benn hag aheurtet a galon, davet ar re-se en ho kasan evit ma lâreet dezhe : Evel-mañ e komz an Aotrou !» Hag int-i, pe e selaouint pe ne rint, rak un anien rekinus int, a ouio eh eus ur profed en o mesk. Setu komz an Aotrou Doue : **Bennozh da Zoue !***

Psalm 123 :

Hon daoulagad àr-zu an Aotrou ken en devo truez doc'homp !

*Sevel a ran man daoulagad tremazoc'h,
C'hwi é chom en neañv.
Setu int 'vel daoulagad serviterion
trema daouarn o mistr.*

*'Vel daoulagad ur vatezh davet daouarn he mestrez,
evel-se hon daoulagad
trema an Aotrou, hon Doue,
é c'hortoz m'en devo truez doc'homp.*

*Ho peet truez, Aotrou, ho peet truez doc'homp,
rak oc'hpenn hor gwalc'h a zismegans hon eus bet da lonkiñ;
oc'hpenn e walc'h en deus lonket hon eneañv
a c'hoaperezh ar vondianed, a zismegañs an dud lorc'hus.*

Eil lennadenn : *Lennadenn tennet a eil lizher S. Paol d'ar Gorintiz*

*Mam Breuder, evit miret nen dahan hag en em sevel re en arbenn ag an traoù
ken uhel a zo bet dizoloet din, eh eus bet lakaet din ur broud em c'horf, un ael da
Satan, karget d'em flemmiñ ha d'em jotadiñ. Rak-se em eus pedet an Aotrou, dre
deir gwezh, d'er pellaat a-zoc'hon. Ha Doue en deus lâret din : «Sikour a-walc'h
az peus bet get man gras ; rak er gwannedigezh e splann man gelloud». Gwel eo
genin enta chom get man gwannedigezh evit ma vo gwelet gelloud ar C'hrist é
chom ennon. Neuze en em blijan em gwannerioù, en dismegañsoù, er prederioù,
er jahinerezhioù, en ankenioù gouzañvet evit ar C'hrist ! Rak, pa vên gwann,
neuze e vên nerzhus. Setu komz an Aotrou Doue : **Bennozh da Zoue !***

Allelouia : *Spered an Aotrou a zo àrnon :*

Ma c'haset en deus da skigniñ an Doare Mat d'ar beorion.

Ar beleg : *An Aotrou Doue geneoc'h : **Ha get ho spered.***

Ar beleg : *Lennadenn ag an Aviel santel hervez St Mark.*

Ar bobl : **Gloar deoc'h-Chwi, ô Aotrou Krist !**

Aviel : *Pennad tennet ag aviel Sant Mark*

*En amzer-se e teuas Jezuz d'e vamm-vro hag e zisiplad a zeuas d'e heul. Ha
pa oa daet dez ar Sabad en em lakaas da gelenn er Sinagogenn. An darn vrasañ
ag ar re a oa doc'h er selaou a oa souezhet-bras an holl anezhe hag e lârent : «A
beban e teua kement-se da henañ ? Petra eo ar furnezh a zo bet roet dezhañ hag
ar burzhudoù bras a vez graet dre e zaouarn ? Daoust ma n'eo ket hennezh ar
c'halvez, mab Mari, ur breur da Jakez, da Jozef, da Jud ha da Simon ? Daoust
ma n'eo ket e c'hoarezed en hor mesk ?» Hag e kavent lec'h ennañ da vout
skandalizet. Met Jezuz a lâras dezhe : «Ned eo disprizet ur profed nemet en e
vro, e-mesk e gerent hag en e di e-unan.» Ha ne c'hellas gober burzhud ebet eno,
nemet un nebeut tud klañv a aeasas dezhe dre astenn e zaouarn àrnehe. Ha
souezhiñ a reas dirak o bihan a feiz.*

Setu Komz an Aotrou : **R/ : Meuleudi deoc'h, ô Aotrou Krist !**

Kredo : **Me 'gred e Doue, an Tad hollgelloudek,** Kroueour an neañv hag an
douar, hag e Jezuz-Krist, e Vab unganet, hon Aotrou, a zo bet koñsevet dre nerzh
ar Spered Santel, ganet ag ar Werc'hez Vari, en deus gouzañvet dindan Poñs
Pilat, a zo bet staget doc'h ar groaz, marvet ha bet lakaet er bez, diskennet d'an
ifernioù, deuet a varv da vev an drivet deiz, pignet d'an neañv, hag azezet en tu
dehoù an Tad, a-eno e teuy da varn ar re vev hag ar re varv.
Me 'gred er Spered Santel, en Iliz santel katolik, e kumunded ar Sent, e pardon ar
pec'hedoù, e adsav ar re varv, er vuhez peurbadus. Amen !

Pedenn hollbedel :

Aotrou, hon Doue, ô Tad Santel, selaouit hor pedenn !

Lid ar profoù : *ar beleg : Pedit, mam breuder, ma plijo get Doue an Tad
holl-gelloudek degemer ma sakrifis a zo ivez ho hani-c'hwi :*

**R/ : Plijet get Doue en degemer ag ho taouarn, aveit e c'hloar hag e veuleudi,
aveit hor mad-ni hag hani an Iliz.**

Prefas :

Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h :

R/ : Ha get ho spered !

Ar beleg : Hor c'halon d'an uhel :

R/ : Emañ troet trema Doue !

Ar beleg : Trugarekaomp hon Aotrou Doue :

R/ : Just ha santel eo !

Santel :

Santel ! Santel ! Santel ! An Aotrou Doue, Mestr an ne hag an douar !

Lan eo get ho kloar an neñv hag an douar : **Hosanna e lein an ne !**

Ra vo benniget an hani a za e anv an Aotrou Doue : **Hosanna e lein an ne !**

Gorreoù : **Degas 'reomp da soñj ag ho marv,
Aotrou Krist savet da vev,
Ha gortoz a reomp ho tistro.**

Hon Tad : hag a zo en neañv, hoc'h anv ra vo santelaet,
Ho rouantelezh degaset deomp,
Ho vennantez ra vo graet àr an douar 'vel an neañv.
Roit deomp hiriv hor bara pemdeziek,
Pardonit deomp hor pec'hedoù,
'vel ma pardonomp d'ar re o deus pec'hed doc'homp,
Ha n'hon laosket ket da gouezh en tantasion
Met hon diwallit doc'h an droug.

Ar beleg : Plijet geneoc'h, Aotrou Doue,... ha distro hor Salver Jezuz-Krist :

**R/ : Rak deoc'h-C'hwi, Aotrou Doue, emañ ar Rouantelezh, ar gelloud hag
ar gloar a-holl-viskoazh da virviken. Amen.**

Lid ar peoc'h :

Ar beleg : Salver Jezuz-Krist... a-holl-viskoazh da virviken.

Peoc'h hor Salver a vo bepred genoc'h.

R/ : Ha get ho spered !